

# SALM 138

Mus. : Anne BODENNEC

Harm. : Adrien CAVAREC

D. Ho tru-ga-re-kaad a ran, va Dou - e, e-vid ke-mend - all a vur - zu - dou.

**D. Ho trugarekaad a ran, va Doue,  
Evid kemend-all a vurzudou.**

1. Aotrou, selled a-dost a rit ouzin,  
Ha va anaoud.  
Gouzoud a rit pa azezan ha va zavan,  
Intent a rit a-bell va zoñjou.

2. Va baleou ha va diskuiz a anavezit,  
Ouz va oll heñchou ez oc'h kustum.  
Krouet 'peus va lounezi,  
Ha va gwiadet e korv va mamm.

3. Ho meuli a ran, ken burzuduz m'ho-peus krouet ahanon ;  
Souezuz eo hoc'h oberou, ha va ene hen goar er-vad.  
Ne oa ket kuzet va eskern ouzoc'h,  
Pa z'on bet greet er sekred, gwiadet e donded an douar.

**R. Je te rends grâce, ô mon Dieu,  
pour tant de merveilles.**

1. Tu me scrutes, Seigneur, et tu sais !  
Tu sais quand je m'assois, quand je me lève ;  
de très loin, tu pénètres mes pensées,  
tous mes chemins te sont familiers.

2. C'est toi qui as créé mes reins,  
qui m'a tissé dans le sein de ma mère.  
Je reconnais devant toi le prodige,  
l'être étonnant que je suis.

3. Étonnantes son tes œuvres,  
toute mon âme le sait.  
Mes os n'étaient pas cachés pour toi  
quand j'étais façonné dans le secret.